


Kerzu/décembre 2013 - niverenn 386 - 4,5 €

bremañ




Palestina

Ar peoc'h biskoazh pelloc'h

Trugarez d'ar vevezerien eus amañ hag eus a lec'h all Trugarez d'ar re a zegas obererezhioù ha labour Trugarez da izili ar Gevredigezh ha d'o gopridi Trugarez d'ar saverien saour Trugarez d'ar re a vrud hor sevenadur Trugarez d'ar laka mennozhioù zout Trugarez da nevez da dalvezifennourien ar galle Trugarez d'ar re a vez roet lañs d'an eko-nomiezh ganto Trugarez d'an dasparzherien mennet-start ha d'ar saverien servijou Trugarez d'ar re a oar broudañ an divezelezh Trugarez d'ar re a vez adlec'helaet o frenadennoù ganto Trugarez d'ar vevezerien eus amañ hag eus a lec'h all Trugarez d'ar re a zegas obererezhioù ha labour Trugarez d'an dasparzherien mennet-start ha d'ar saverien servijou Trugarez d'ar vevezerien eus amañ hag eus a lec'h all Trugarez d'an holl re o deus kemeret perzh abaoe 20 vloaz...

Deoc'h holl e lavar **Produet e Breizh** Mersi bras !



1993
2013
Talvoudoù da rannañ

www.produitenbretagne.com

Adkavout hent ar peoc'h

Piv a daol evezh c'hozh ouz an dud a vez lazhet bemdez en Irak ? Pe e Siria ? An lakad brezel nevesañ bet lakaet er mediaoù, hini Kreiz-Afrika, en deus distroet ar speredoù diwar ar pezh a yae da leuniañ ar c'hazetennoù, n'eus ket ket-se... Evel-se emañ kont. An eil brezel a gas egile pell diouz ar c'hameraoù.

Pa gomzer eus Palestina ez eo gwashoc'h c'hoazh an traoù. Gallout a ra dalc'h ar c'henveañ seblantout bezañ diziskoulm. An dud deuet a vremañ o deus bet klevet anv a-viskozh eus ar c'hrogadoù taer pe daerc'h etre Palestiniz hag Israeliz. Ken e c'hall soñjal da lod ez int tonket da badout da viken...

En niverenn-mañ e reomp anv eus tud, kalz a Vreizhiz en o zouez, hag a zegas o skouzell da Balestiniz hep gortoz an diskoulm meur. Meur a desteni a ro da santour ar gwask lakaet war ur boblañs na c'houlenn nemet derc'hel da vevañ war he douar.

Seul vui e tremen an amzer avat seul ziaec'h e vo sevel ur Stad palestinat ma c'hallfe Palestiniz kaout o holl wirioù. Derc'hel a ra Stad Israel da aesaat an trevadenniñ hep ober van ebet eus ar pezh a embann broioù all ar bed.

Ret e vo da vuoc'h a Israeliz sevel evit lakaat un harz d'ar politikerezh-se ha klask adkavout hent ur gwir beoc'h padus. Daoust ha prest eo broioù ar C'hornôg da harpañ nerzhioù demokratel Israel avat ?

- P.3** TAOLENN HA PENNADIG-STUR
- P.4-5** POLITIKEREZH
Lod eus azgoulennoù ar bodad "Bevañ, divizout ha labourat e Breizh."
- P.6-7** KEVREDIGEZH
Skuihz eo pomperien Lannuon gant dafar n'eo ket diouzh o ezhmouù.
- P.8** ENDR
E Varsovia e oa bodet kannaded Stadoù ar bed evit ober anv eus an hin.



P. 9-14 TEULIAD AR MIZ
Palestina ar peoc'h biskoazh pelloc'h
Bepred ken start ha tenn an traoù evit Palestiniz, zo bepred o klask mirout ouz o douaroù da vevañ aloubet. Ober a reomp anv en niverenn-mañ eus ar rouedad skouzell APPS, kêriadenn Nabi Saleh, Bedouined an Naqab/Negev ha Palestiniz Bethlehem.

- P.15** YEZH
Ur stourmer eus Aï'ta ! zo bet barnet etre miz Du ha miz Kerzu.
- P.16-17** DIAR MA FENNHER
Estreget schtroumpfiñ pe dischtrompfiñ a c'heller ober : hanial pe dihianial.
- P.18-19** SEVENADUR
Ar c'hahaner ha gitarour Lou Reed zo aet d'an Anaon d'ar 27 a viz Here 2013.
- P.20-21** LENNOMP!
Div bajenn savet a-ratozh evit an deskidi gant skipailh Skol an Emsav.
- P.22** EMBANN
Mekanoskrid an Eil Orin, Emsav gant Georges Cadiou hag un dibab levrioù all.
- P.24** SEVENADUR
Ur re c'hoarioù video **Pokémon** nevez zo bet embannet nevez zo.

Emañ skipailh **Bremañ** o klask kenskriverien nevez bepred, brezhonegerien gouest da bledin gant danvezioù lieseur. N'ho peus ken nemet kas ur gerig da : breman@skolanemsav.com

Evit gouzout hiroc'h pe komanantiñ d'ar gelaouenn : www.skolanemsav.com ha pajenn Facebook **Bremañ**

Nedeleg laouen deoc'h holl !

Bremañ - kelaouenn vizek brezhonek savet e 1980 / revue mensuelle en langue bretonne fondée en 1980 • Niv. CPPAP 1116 G 68732 •
 • Rener an embann / Directeur de publication : Olier ar Mogn • Bodad skridaoz / Comité de rédaction : Tangi Legavre, Olier ar Mogn, Iwan Kadored •
 • Sekretourez / Secrétariat : Saridn Gauvain • Kontouriezh / Comptabilité : Nadine Enjalbal • Skuzenn ar golo / Photo de une : © P'yan Rodick Beler •
 • Luc'hskeudennou / Photographies : Yann-Louis Kabell, Benoist Lukau, Anig Lucas, Fabris Cadou, Antraig Kerwella •
 • Ar pennoù embannet ne engouestont nemet ar re o deus o skrive ! Les articles publiés n'engagent que la responsabilité de leurs auteurs •
 • Kourmant / Abonnement d'un an : 50 € - Skouzell adalek / Abonnement de soutien à partir de : 60 € - Estrennoù / Abonnement à l'étranger : 60 € •
 • Embannet gant / Edité par : Skol an Emsav, 25 straed Pierre Martin, 35000 Roazhon • Pgz 02 99 38 75 83 - Pk 02 99 83 82 28 •
 • Skridaozerezh / Rédaction : Pgz 02 23 20 62 29 • Postal / courriel : breman@skolanemsav.com • Internet : www.skolanemsav.com •
 • Moullet gant / imprimé par : Printcorp, Sant-Brieg • Pajennaoz / n° 386 Kerzu 2013 / Mise en page n° 386 décembre 2013. Miliu Latimer •

Paeañ a rit ho komanant dre chekenn ?
 Sellit ouz an niverenn a-us d'hoc'h anv war ar folenneg. M'eo an niverenn 386, kasit ur chekenn (50 euro) pe leaguit an doze lamadenn er bajenn 23 evit bezañ sur da resev an niverenn a zeu.

Evit gellout degemer an niverenn CPPAP eo bet troet ar menegou ret e galleg, kouz hag ar miz war ar golo.

Bevañ, divizout, labourat e Breizh, ha bremañ ?

Souezhet eo bet an dud gant berzh an div vanifestadeg vras "Bevañ, divizout ha labourat e Breizh" aozet diwar intrudu Kristian Troadeg, maer Karaez ha kuzulier-Departamant, ha Thierry Merret, prezidant FDSEA Penn-ar-Bed. Souezhet eo bet an aozerien kement ha penno uhelañ ar Stad. Tri c'hemennad a oa gant an div vanifestadeg-se, gwelet evel istorel gant lod. N'int ket bet merzet gant an holl, nac'het int bet gant reoù zo zoken. Adkemeret ganto lugan ar bloavezhioù 1970 "Bevañ ha labourat er Vro" e fellas d'an aozerien ouzhpennañ ar c'hoant da zivizout o dazont o-unan. Tro en deus roet ar ger-stur-se da vodañ da bep seurt tud, da grouiñ ur spered a unvaniezh ha na dizher nemet ral a wech e Breizh. Gopridi ha patroned asambles evit huchal o displijadur, o c'hounnar, o razailh a-wechoù. Pezh a c'heller kompren pa vev ekonomiezh Breizh un enkadenn hep he far ha pa vrall evit meur a abeg ar patron en deus roet tro da Vreizh da ziorren ha Frañs da vezañ maget : klask war doareoù nevez da veveziñ, ha kevezerezh etrebroadel dreist-holl pa 'z eo bet frankizekaet marc'had al labour en Europa.

Sur eo ez eo stalladur an ekotaos, war an treuzdougen marc'hadourezh gant kirri-samm, en deus lakaet an traoù da darzhañ. Stourm a rae ar bed ekonomikel abaoe pell a-enep dezhañ koulskoude. Gounezet e oa bet, dre ar stourm, un digresk a 50% peogwir eo pell Breizh diouzh kreiz ar C'hwec'hkom. Krouet e oa bet an taos-se pa oa Nicolas Sarkozy prezidant. Ne oa ket bet taolet ar bec'h wamañ gant ar gouarnamant a vremañ. Daoust d'an aergelc'h bezañ stignet, netra ne lakae da grediñ e vefe an taos a re. Pell zo e c'houlenn an embregerezhioù dre-vras un digresk a dalhoù ha doareoù simploc'h a-berzh ar velestradurezh. Abalamour d'he ferzhioù dibar e-kefever douaroniezh, met ivez war an dachenn sevenadurel, bepred he deus diwallet Breizh muioc'h eget re all, e vefe dalc'het kont eus he saviad dibar.

AN TAOS A RE

Gellout a reer soñjal ne vefe ket bet ken kreñv an emsav a zivian e Breizh ma ne vefe ket bet tizhet kement ar c'hopridi gant an enkadenn. Met perak manifestiñ gant an penno embregerezhioù ? Arabat krediñ ez eo touellet ar c'hopridi met gouzout a reont ez eus ul liamm etre stad an ekonomiezh ha stad an embregerezhioù. O wellet

ar maner-kartoù o kouezhañ, o deus gouezet chom pragmatek. Penaos difenn an implijioù ma ya ar stalioù labour da netra ? Eil kemennad pouezus ar vanifestadeg eo. Marteze e c'heller gwelet aze un doare kenemglev evel en Alamagn m'eo kustum a-gozh ar batroneg hag ar sindikadoù da glask asambles an diskoulmoù evit mad ar greanterezh broadel. Stag eo ivez ar c'hopridi ouzh ar binvioù produiñ a dalv labour. Liammet eo sur ouzh unan eus perzhioù all ekonomiezh Breizh. Ur plas bras zo gant an ijineriezh produiñ ha produiñ boued dreist-holl. N'eo ket ken pouezus an arvokañ er patron ekonomikel-se. Stourmet en doa gwelloc'h ouz enkadenn 2008, "ekonomiezh gwirion" a-enep "kapitalouriezh arc'hant."

Trede elfenn saviad Breizh zo politikel. N'eo ket bet merzet sklaer gant an dilennidi ha tamm ebet gant ar gallowd kreiz. Ez-sokiologel ez eo kerreizh Breizh. A-du gant Europa, kentoc'h sokio-demokrat, stag ouzh un doare liested politikel, ar Vretoned o deus d'ober gant ur sistem daoustroladek hag a ro an tu kreñv d'ar strollad sokialour er mare-mañ. Politikerezh kalc'hoñ ha dichekoc'h ar gouarnamantoù a-zehoù hag a-gleiz, tra ma weler an tu-dehoù pellañ o kreskiñ, a ya pelloc'h-pellañ diouzh santadoù an dilennerien

vrezhon. Ouzhpenn-se, ar promesaoù bet graet e-pad dilemmadeg prezidant ar Republik, hag o doa ur ster e Breizh a zo troet da douelloù. Skubet eo bet dichek ar menad 56 a-zivout kadamadur sinadur Karta Europa ar yezhoù ranvro ha minorelaet. C'hwitet eo bet Akt III an digreizenneañ. Ankounac'haet ar bromaesa adwelet ar gwiskadoù diniver a liveoù melestradurezh, ankounac'haet ar gwir da amodiñ evit ar ranvroioù. Ne chom nemet kresk ar meurgerioù a laka ur gwiskad ouzhpenn d'ur meskaj luziet, poumer ha digomprenus. Petra wel er c'hoari dijac'h-se Yann geodeour estreged difenni interestoù personel ha gwareziñ baronelezhioù dilennidi zo. Mont a ra Frañs war an tu kontrol-mik d'ar pezh a vev graet en Europa. Kembreiz, Galiz, Sarded, Katalaned, Skozia ha katz pobloù all o deus bremañ gwirioù dibar hag un emrenerezh ledan peledanoc'h. Er C'hwec'hkom zoken ez a Korsika war-raok, war dachenn ar gwir gant ur statud dibar, ur chadenn skinwel Ispalia ha war dachenn ar yezh gant kelennadurezh ar c'horseg e pep klas. Fellout a ra da zilennidi an enezenn e teufe ar c'horseg da vezañ yezh kenofisiel. El luskad-se e seblant Breizh bezañ bet ankounac'haet-mik. Hag o thiunni e vefe he nerzhioù ?



Kristian Troadeg, maer Karaez, e-touez penno ar bodad "Bevañ, divizout ha labourat e Breizh", dirak milleroù a dud e Kerampuilh d'ar Sadoù 30 a viz Du.

UL LUSKAD WAR GRENVAAT

E-kerzh manifestadegoù an 2 hag an 30 a viz Du 2013 e santed spered ar C'elb (*Comité d'étude et de liaison des Intérêts bretons*). Ar vodadeg-se a berzhidi liesseurt a verkas istor Breizh hag a zisoc'has war steuñv breizhat an hentoù, hentoc'h evit manni, ar garta sevenadurel, a zo e soñj an holl. Evit gouini e-le ar Vretoned bezañ unanet bepred. Ersavioù dilennidi zo ha kelaoennoù zo n'hellont nemet bountañ da seurt emglev. Ar gerioù gav embannet a-enep aozerien al luskad a ziskouez an toullvez o ledanaat etre an dud war an dachenn hag ar bolitikerien e par Frañs, pell diouzh emdroadur ar bed. Ar c'helaouenn m'irourelañ hag ar gallowd kreiz, o vagon budud trechalus a-zivout "torerien" a vije deuet eus enebourien an eured evit an holl ha strolladoù a-zehoù pellañ, a ziskouez splann ne anavezont netra diwar-benn ar c'hudennoù pe e klaskont, gant ur feiz fall a-boan kuzhet, mougañ an emsav. Un nebeud a gannoùigoù a oa bet e-kerzh dibunadeg an 2 a viz Du, manifesterien zo o tagañ n'eo ket stalladurioù-kêr pe an tiez-kofevs (ar goñversanted a oa a-du gant an emsav mod-all) met arouez ar gallowd, ar Prefeti, pezh a zo un dra voas en ur vanifestadeg eus ar vent-se kentoc'h. Gellout a reer merrout ne voe gwelet banniel gall ebet

met kantadoù a Wenn-ha-Duioù, ha mileroù a vonedoù nuz (arouezioù bet dibabet gant an aozerien e koun emsavadeg ar Bonedoù nuz e 1675) ; pezh a ziskouez sklaer ne oa roud ebet eus an tu-dehoù pellañ gall. Ar c'hozh kaozioù mediatek-se n'o deus graet nemet kreffvaat an emsav ha reiñ dezhañ ur vent poblek. Rak, a-benn ar fin, n'eo ket an "dorrierien" a ra aon d'ar gallowd kreiz met ar Vretoned. Gellout a ra ur Breizhad minwasket servijout e interestoù, n'hell ket ur Breizhad dieubet diouzh ar gwask Jakobin en ober avat.

Ha bremañ ? Ar goulenne-se a drubuilh an dam vrasañ eus ar vanifesterien goude an deroù emsavadeg-se. Porchedoù an ekotaos zo kouezhet an eil war-lerc'h egile. Ampellet eo bet an taos nevez-se gant ar gouarnamant met n'eo ket bet dilezet da vat evit Breizh. Kinnig a ra ar c'hentañ ministr, Jean-Marc Ayrault, sinañ un "emglev evit dazont Breizh" hag a zo bet votet war-bouez nebeut ket dilemmidi ar Rannvro. "Ya" e vije bet respont an dud bodete "Bevañ, divizout, labourat e Breizh" ma vije disoc'het war diskoulmoù fetis.

Gant al liesseurt-kenañ m'eo al luskad, petra a c'hallje bezañ bet an "emglev evit dazont Breizh"-se eta ? Gellout a reer gwelet un nebeud mennozhioù kreñv. A-raok

pep tra e seblant ret dilezel an ekotaos ha diskar ar porchedoù. Divizoù evit mirout ar postoù labour, gwarezñ ar c'hopridi, eunaat doareoù ar velestradurezh evel m'en doa prometet ar gouarnamant a zo da gemer ar buanañ ar gwellañ. Met donoc'h eo ar c'hleñved, ret e vo kavout un diskoulm evit reiñ ur statud arbennik da Vreizh, digreizenneañ muioc'h, reiñ ar gwir da amodiñ, adunvaniñ ar Vro ha reiñ dezhi un emrenerezh war dachenn an arc'hant. N'eus deuet nemet un aezhennig a stourm eus ar brim-gaoter vrezhat. Evit dieubiñ an energiezhioù ha mirout ouz an traoù da vont d'ar gwashañ e teer sevel ar golo. An dra-se a c'hoarvez ar Vretoned abaoe pell. Poent eo echuiñ gant an disouezhennoù, ar promesaoù na seveler ket hag an dispriz Jakobin. N'eo ket Breizh un tirad evel ar re all. Hec'h istor milvedel, oberiantiz he fobl, ar c'hoant he deus bepred da vezañ en-dro digor war ar bed a zle dont da vezañ en-dro an nerzhioù a roio tro da sevel un dazont seder ha bleunius.

Mikael Bodlore-Penlaez
brezhoneg gant Herve Latimer

frankizekaat : lemel veleñnoù war dachenn an armerzh
arvokañ : prenañ ha gwerzhañ tabouedoù ; hervez ma kreskont pe ma tigrskont, e-sell da c'hoant arc'hant
ersav : emzalc'h ; heulier da-heul un ober pe un darvoud diavaez



Un hir a stourm e Ti ar Bomperien

Harz-labour ne c'hoarvez ket alies gant paotred an tan. A-hed miz Here o doa paouezet gant al labour d'ar 1st, d'an 11, d'ar 17 ha d'ar 26 koulskoude. Harpet gant ar sindikad C.G.T. e oa bet ar bomperien o sevel o mouezh, a-benn ar fin, evit kelaouiñ an dud ha gervel an dilennidi, heuget ma'z int gant stad hag aergelc'h gwashoc'h-gwashañ o labour. Anthony Leuranguer ha Frédéric Gérard, dileuridi C.G.T., o deus lâret o soñj ha re all c'hoazh, e kazarn Lannuon, e-lec'h m'emaint o c'hortoz ma teufe da wir raktres ar c'hazarn nevez abaoe 2006. Eno e oa bet aozet un devezh harz-labour ha dorioù digor war un dro, d'ar Sadorn 26 a viz Here.

Degeperet e oa bet tud Lannuon gant ar bomperien ha diskouezet d'ar vugale penaos ober gant ar gorzenn enepitan. Gitanou a oa bet stalat gante evit embann perak int tumet.

abaoe un toullad bloavezhioù e teu an aergelc'h hag an darempredoù da vezañ tenn ha pounner ha gwasket omp gant al labour, emeze. Ne vez ket implijet ar c'hiri-samm a-feson hag an dud ne vezont ket stummet evel m'eo dleet ken. Nav fost-labour a chom dibourvez. Ne vez ket roet dilhad ken abaoe daou vloaz. Graet e vez war-dro ar c'hamionioù hag an holl weturaj gant dale spontus. Ar prantadoù-stummañ a vez krennet pe freuzet. Ne vez na doujet nag heuliet dibaboù ar bodadoù kempari zoken hag anvet tud war postoù zo diwezhat-tre. N'eo ket heñvel an doare da labourat e pep kreizenn. Peder eurvezh warn-ugent labour-guard a zo paet 16. Ha n'eo ket echu : kaoz a zo da ziazezañ ar pignadur war an delid ha n'eo ket war ar bloavezhioù labour. Met penaos muzuliañ dellid pep hini pa vez labourat a-stroll ? Kinniget ez eus bet vez lakaat da gloc'hañ an derez-karg (pe galoñs) gant kargoù termenet da vat, ar pezh a virfe kreizennoù-sikour zo da vont en-dro. Da skouer, n'hallef ket an hini a ra war-dro an ambulans e Lannuon abaoe pell kenderc'hel ken... Peadra da lakaat ar bomperien a vicher da darzhañ, ar bomperien a-youl vat da vezañ kengret gante, an holl da skrivañ

luginioù e gwenn war o c'hamionioù ruz ha, n'eo ket difennet huñvreal, peadra da lakaat ar galloudoù publik da zihuniñ !

AN TRI DEVEZH HARZ-LABOUR KENTAÑ

D'ar 1st ha d'an 11 a viz Here e oa bet graet ar veaj da Sant-Brieg gante. Chomet e oa drespont o goulennoù ar wech kentañ hag an eil e oa damheñvel war-bouez promesa Vincent Le Maux, is-prezidant Servij-departamant an taniou-gwall hag ar sikourioù (SDTS) ha kuzulier-departamant, reiñ un derez-karg uheloc'h d'un 50 bennak anezhe, ar pezh o do abred pe ziwzhat forzh penaos. Gwashoc'h c'hoazh, gour-drouzet e oant bet gant o fennoù bras da dapout taolioù-kastiz ma kendalc'hfent gant o emsav. Ouzhpenn hadañ an disparti e oa bet klasket hejañ ar garantezenn hag ar vazh 'ta, armoù ordinal ar galloud. D'ar Yaou 17 a viz Here e oa bet kendalc'hnet koulskoude. Ar wech-se e oa bet damstank-pet Viarmes e Lannuon e-tro 6 eur noz. Kamionioù ruz "Aergelc'h sokial brein" pe "Gwask ha kastiz gant an dilennidi" skrivet warna e oa parket a bep tu, mell todion o c'hwitellerezhioù-tro o vourzañ divskouarn an dud hag ec'h karbonek strewet war an hent. Traktoù gant ar rag hag ar perag a oa

bet roet da gement blenier a dremene dre an daou groasht-tro a bep tu d'ar pont avat. A-boan un eurvezh war-lec'h penn-kentañ an ober-se e oa bet pellgomzet da Jean-Luc Jaffre penn ar c'hazarn, evit lâret dezhañ e vo kastizet an holl bomperien e gward d'an devezh-se ! Gallout a rafe bezañ betek tri devezh dic'hoir pe muioc'h... Ha n'o deus ket fent an uhelgaloñset ?

DORIOÙ DIGOR DREISTORDIAL

E Lannuon, hag e lec'h all moarvat ivez, eo ar greizenn-sikour a zo da adober traoñ ha kreñ-h ouzhpenn-se. Un abeg mat ouzhpenn evit aozañ un devezh harz-labour all ha dorioù digor war un dro d'ar 26 a viz Here evit kelaouiñ an holl ha diskouez pegen brein eo deuet ar c'hazarn da vezañ. Un toullad pomperien a heñche an dud dre milendall ar savadurioù, daou pe dri all a zeske d'ar vugale penaos ober gant ar goaf-dour ha re all c'hoazh a ginnige gwestell ha kafe d'an dud ha lakaat o anv war sinadeg. Kalz tud a oa deuet, Christian Marquet, maer Lannuon, en o zouez. Anat eo eo deuet re vihan ha re gozh ar greizenn-sikour-se. Ostihoù zo n'int ket ken diouz labour paotred ha merc'hed an tan. Ar



Re strizh ez gwiskva ar c'hazarn. N'eus sal-sport gwion ebet. Pomperien o kaoball gant maer Lannuon, Christian Marquet (e-glede).

Dour-ell hag ostiennou tredan er memes paotr, dour-beuz e trepasioù zo zoken. Koulskoude eo tommañ an li, diskouet ma'n deus tommerzh ebet er sal-dour.

savadurioù n'int ket difuet ha kostañ a ra ker-ruz tommañ anezhe. N'eus ket plas a-walc'h evit klozañ an dilhad er gwiskva e-lec'h o devez poan daou den da dremen asambles. N'eus ket strinkerezhioù a-walc'h na tommerzh er sal-dour. N'eus sal-sport ebet war al lec'h daoust m'eo net dezhe pleustriñ gant o c'horf ingal. Paet hag ostilhet e oa bet ur sal Algeco 15 m'anezhi evit kigenañ un tamm, gant arc'hant an deizadurioù. Ur sal Algeco all a servij d'ar stummañ, pa c'hoarvez, da ziskuzhañ ha d'en em vodañ... Gwashoc'h c'hoazh, tremen a ra dour ar glav dre an doenn ordin pa n'eo ket dour-beuz a vez gwelet o treuziñ ar trepasioù, gwech an amzer... Ha war ar marc'had, n'eo ket bet dilbabet c'hoazh lec'h ar c'hazarn nevez gant an SDTS. Daoust d'al labourioù bet raktreset e 2014 ha da skipall Lannuon bet respontet d'ar c'hinnigoù ha lakaet evel c'hoazh kentañ hini takad-labour Pegaz, an hini gwellañ a fed izokronoù; surenteg hag efedusted. Met den ne oar abalamour da betra e oa bet gwelet n'eus ket pell zo tud o studian takad an Aod Uhel, e-lec'h ma oa bet nac'het staliañ ur skollaj nevez rak leun a danvezioù piistrus eo, hervez. Ha lakaet e vo tud o deus ezhomm bezañ ya'e evit sikour ar re all da vezañ klanv-diglañ ?

E MIZ DU... HA KERZU

E-kreiz miz Du e oa ar respontoù sklaer da zont, sañset. Maer Lannuon en doa kinniget un emvod triennek gant ar bomperien, tud ar c'huzul-departamant ha tud an tiker. Emaint bpred o c'hortoz all tud an departamant. An emvod a oa raktreset gant Vincent Le Maux, eilprezidant an departamant, d'ar 14 a viz Du, evit nullet war un toullad poentoù a oa bet nullet a-benn ar fin rak "ar C.G.T. a zistruj an aergelc'h sokial". D'ar memes devezh 'ta, e-pad an noz, e oa bodet paotred an tan evit un ober arouezel dirak savadur nevez an departamant e Lannuon : reiñ o zokamoù da baotred ar melstradur ha livañ "Ar greizenn nevez, pegouez ?" gant livaj gwenn Pariz ouzh ar mogerioù. D'an 18 a viz Du e oa bet dalc'het ur bodad teknikel kempar a-benn ar fin. "Graet o deus dilennidi an departamant ha rener ar SDTS evel pa ne vije enkadenn ebet" eme Frédéric Gérard. Ne oa bet kinniget devezh resis ebet c'hoazh evit lakaat ar goaz war ar poentoù meneget uheloc'h. Lâret e oa bet ec'h embannfe Claudie Lebreton, prezidant ar C'huzul-departamant, divizoù nevez, e-kerzh miz Kerzu. Da c'hortoz o doa aloubet ar bomperien kroasht-tro meur Pegaz e-pad an

noz evit sankañ en douar mein kentañ ar c'hazarn nevez. An disoc'h nemetañ evit ar c'houlz eo ar gourdrouz : pevarzek pomper a vo kastizet, seizh e Lannuon ha seizh all e Dinan.

Gant ma ne oa keloù ebet o tont digant tud an departamant o doa divizat ar bomperien aloubiñ kuzul-merañ an S.D.T.S. e savadur an departamant, d'ar 5 a viz Kerzu. Kaozeadennoù hir ha tenn a oa bet met m'eo nemet en deiz war-lec'h e oa bet embannet er c'hazarn gant Claudie Le Breton, prezidant Aod-an-Arvor, e oa divizat a-benn ar fin lec'h nevez kreizenn sikourioù Lannuon : takad industriezh Pegaz 5, evel m'o doa goulenet ar bomperien. Gallout a rafe bezañ prest a-benn 2016-2017. Souezhus eo memes tra kelaouiñ soudardet an tan dre ar c'hazarnioù. N'eus tra resis ebet c'hoazh diwar benn ar goulennoù hollek...

Yann-Loeiz Kaball

1. bodad kempar : commission paritaire
2. izokronoù : doare da vuzuliañ an amzer ret evit mont da lec'h-mañ-lec'h (betek 5 mtr pe 10 mtr da skouer, a bouez bras evit ar servijoù-sikour)
3. gwenn Pariz : poull karbonat kalkiom (i.e. kiez), implijet kalz evit aozañ livaj pe mastik. E galleg e vez graet blanc d'Espagne, blanc de Meudon pe blanc de Troyes eo-se.

Emvod Varsovia : re nebeut, re ziwezhat

Kannaded 195 a riezoù a oa bodet adalek an 11 a viz Du e kêr-benn Polonia evit klask gouzout penaos diskoulmañ kudenn ar c'hemmoù degaset en hin gant an aezhennoù efed ti-gwer. Ret e oa bet astenn ar vreutadeg betek an 20 a viz Du evit klozañ an abadenn. Un emvod evit prientiñ feur-emglev Pariz e miz Kerzu 2015 e oa, evel ma vo hini Lima e 2014. Gant feur-emglev Pariz e vo lakaet an holl vroioù da gemer perzh enni evit ar wech kentañ ha lakaet e vo da dalvezout e 2020. Ar pezh zo da gompren siwazh : re zister e vo ar strivoù asantet dezho evit hol lakaat da vont war gorre ar bec'h da zont.

emiz Mae 2013, e oa bet muzuliet e Hawaïi bec'h ar CO₂ en aergelc'h en tu all da 400 a barzhioù dre vilion (pdv), ul live tizhet buan-spontus abaoe ma oa aet bec'h ar CO₂ en tu-all da 300 pdv kant vloaz zo, anezhañ ul live ne oa bet tizhet biskoazh e-kerzh ar milion a vloavezhioù tremenet en e raok. Ar seizhvet bloavezh tomma abaoe 1850 e bet 2013 ha merket eo bet gant darvoudoù liesseurt en endro evel ar gell'hwidenn dic'hortoz he nerzh hag e oa bet drastet ul lodenn eus Filipinez gant.

Mont a ra ar CO₂ d'ober 60% eus an aezhennoù efed ti-gwer distaolaet ha kreskiñ a ra o bec'h en aergelc'h abalamour d'an ezhommoù energiezh kreñv degaset gant ar modoù bevañ nevez. Produet ez eus bet 44% eus an ec'hodadoù CO₂-mañ gant implij ar glaoù hevlene, 35% gant hini ar petrol ha 20% gant hini ar gaz naturel. Ur c'hresk a 54% zo bet gant ar bevezñ energiezh abaoe 1990 hag implijet ez eus bet glaoù, petrol ha gaz naturel evit terriñ ouzhpenn 80% eus an ezhommoù-mañ e 2013. Abeg kresk bras an temperadurioù keitat e vefe, temperadurioù aet, hiziv an deiz, 0,8°C uheloc'h eget ma oant e fin an 19^{vet} kantved. A-walc'h eo bet ar c'hresk-se evit lakaat ar skomegi da gilañ er menezier hag eus ar drast-usañ e vefe o steuzadur, da skouer, evit

broioù poblet stank douret gant ar stêrioù a zeu diouto evel Pakistan.

REOLENNOÙ KEMPLEZH EMDROADUR AN HIN

Anat e teu ne vo ket a-walc'h ar strivoù asantet dezho war an dachenn etrebroadel evit mirout ouzh an temperadurioù keitat da vont 2°C uheloc'h eget ma oant e fin an 19^{vet} kantved. Da lâret eo al live ma ne vo ket gallet - hervez kumuniezh ar skiantourien - mestroniañ emdroadur an hin en tu all dezhañ. Reolennoù kemplezh eo re emdroadur an hin ha n'eo ket asur ar skiantourien eus efedoù o c'hinnigoù warnañ. Lakaat a ra kresk an temperadurioù douaroù uhelañ an hanternoz da ziskornañ, da skouer, ha serret ez eus enno miliardoù a donennadoù metan, un aezhenn efed ti-gwer ugent gwech kreñvoc'h eget ar CO₂. Peadra zo da vezañ enkrezet o klevet ne vez ket dalc'het kont eus an arventenn-se er studiadennoù implijet evit klask petra ober. Embann a ra kalz skiantourien ez aio marteze kresk an temperadurioù keitat en tu all da 4°C a-raok fin ar c'hantved, da lâret eo reoù tomoc'h eget reoù ar mioken, etre 25 ha seizh milion a vloavezhioù zo, pa oa diskorm ar bed en e bezh pe dost. Re vresk eo hon endro evit en em zoareañ ouzh ur c'hemm ken herus siwazh.

AN DIGRESK EKONOMIKEL YAC'H EVEL DISKOULM

Emañ orin an darvoud en ur c'hresk ekonomikel hag a c'houlenn kalz energiezh evit padout. Setu perak e kinnig lod eus an ekologourien an digresk evel diskoulm. Ne c'hell ket pennoù ar riezoù ober ur seurt dibab hep koll o galloudoù siwazh. Gounezet e vez ar peoc'h sokial hag, evel-se, padusted ar renadoù e meur a vro, o pourchas peadra da vezeñ d'ar boblañs. Muzuliet e vez nerzh ar broioù gant o fro-duadur diabarzh, ha pa vefe kalz efedoù dic'hoantaet gantañ. Reiñ a rae pennoù ar Stadoù-Unanet da c'houzout, da skouer, pa oa bet goullennet diganto digreskiñ, mod pe vod, an ec'hodadoù CO₂, ne c'helled ket kemman mod bevañ o c'henvroidi hep nozout ouzh o identelezh. Ar mod da verkañ e renk er gevredigezh eo ar bevezñ er broioù aet pell gant implij an nerzhioù ekonomikel Industriel, ha produet e vez kalz madoù evit-se enno hep soursial ouzh dazont an endro. Ma vefe bet furoc'h an dud e vefent aet gant un hent disheñvel pell zo. Nebeutoc'h a vadoù a vefe produet, met ne vefe ket bet lakaet, dre ret, muioùc'h a dud maez ar JEU kevredigezhel gant digresk ar fred gopret. Ingalet e c'hellfe bezañ bet al labourer boblañs oberiant ha muioùc'h ar amzer vak a vefe bet gant an holl.

Paol ar Meur

Pouez ar c'hengred

Pa vez an doenn-vor o ruilhal war vord ar vag, paket e-kreiz ar gorventenn, eo pouezus en em glevfe ar voraerien diouzh ar c'hentañ. Pa vez an arnev o tostaat eo pouezus kaout amezien prest da reiñ dorn evit eostañ ar gwinizh ar buanañ ar gwellañ. Priziañ a ra ar Vretoned ar c'hengred. N'eo ket souezhus gwelet pegen niverus eo ar c'homiteoù savet e Breizh evit skoazellañ ar pobloù mac'homet er bed. E-touez an aozadurioù-se e c'heller menegiñ strolladoù lec'hel Association Française Palestine Solidarité (AFPS).



abaoe bloavezhioù ne vez ket klevet kan ar peoc'h ken en ur vro he deus gwelet teir relijion o tiwanañ. A-feur ma tarzh trouz an armoù e pella ar chañs da welet div bobl o kenvevañ war ar memes douar. E 1987 hag e 2000 e oa bet roet lañs d'ur mod emgann nevez, an Intifada. Gwelet bugale ha krennarded o teurel mein ouzh kirri-hobregonet en deus lakaet an dud da zerc'hel soñj eus ur vojenn ken kozh ha Jeruzalem, hini David ha Goliath. Digempouez eo an nerzhioù tal-ouzh-tal. Dre ar skeudennoù skignet dre ar bed a-bezh eo deuet da vezañ anat o deus ezhomm Palestiniz da vezañ soutenet. Krouet eo bet ar gevredigezh AFPS e 2001 gant ur pal resis : bodañ an hiniennoù o deus c'hoant ma vefe doujet gwir ar pobloù d'en em hallow o-unan. Embann a reont ne c'hallor ket sevel ur peoc'h padus tra ma ne vo ket doujet an disenteziou etrebroadel.

klask kendrec'hiñ an dilennidi ez eo reizh goullenn ouzh Israel ma vefe doujet ar gwir etrebroadel. Ul labour "lobbying" eo hag a gemer kalz amzer. Allies e vez aozet sinadegoù a-du gant dieubidigezh ur stourmer Palestinat, gant pourvezadur an dour mat da evañ e Palestina, gant frankiz tremerezh ar gazetennieren. N'eo ket an temoù a vank gant an diaesterioù hag ar skolioù pemdezike a zo gwir binjennnoù evit ar boblañs.

OBEROÙ

Raktresoù pleustrek zo war ar stern ivez. Pourvezañ meur a zavez zo deuet da vezañ diaes gant an ac'huberezh hag an trevadennerezh. Klask lakaat Palestiniz da vezañ emren eo ar pal. Dalc'homp soñj pegen pouezus eo an douren ur vro sech. Emañ ar goullenn-se e kreiz ar brezel peogwir he deus ezhomm pep bro da dennañ s'plet eus rouedad dourioù ar Jordan. Bras eo ar mivaoù dour er Golan hag e Sis-Jordania. Buan a-walc'h e c'heller lavarout eo kudenn an dour abeg ar brezelioù. Pal ar raktres eo sevel mivaoù lec'hel (500 betek 2000 m³), tost ouzh an atantou, a zalc'h an dour pa vez glav. Kalz labour a oa bet kaset da benn evit gwellaat efedusted ar rouedad ha chom hep koll re a zour en tuellennoù. Pouezus eo steuñv ar c'hanouc'helloù evit ma rafe berzh ar goullennerezh. N'eus ket bet degaset ur raktres evel-se eus an diavaez nemetek. Douget eo gant al labourerien-douar. Paeañ e vez ar peurrest eus ar sammad gant donezonoù dastumet gant ar gevredigezh. Stourmerien all zo e soñj plantañ 1 350 gwezenn-palm evit reiñ ur gopr dereat d'ar gourerien. Ret eo postañ arc'hant e

kambreier yen ma fell d'ar c'hooperativoù mirout an dadez.

KEHENTIÑ

Bevañ a reomp en ur bed ez eo pouezus ar c'hehentiñ ennañ. Komprenet o deus izili AFPS ez eo efedus diskouez oberoù Stad Israel en tiradoù aloubet evit aozañ boikot an danvez fardet gant embregerezhioù israelat. Ur brezel armerzhel zo etre broioù ar bed. Pa vez ur skeudenn fall war ur vro ez eo ur skoliñ evit dont a-benn da werzhañ he madoù. Ouzhpenn-se e koust ker-ruz derc'hel ul lu ken bras evit ur vro ken bihan. Deuet eo ar vuhez da vezañ start goude an enkadenn he deus skoet ar bed e 2008. Hiziv, n'eo ket yac'h-pesk armerzh Israel. Efedus eo bet ar boikot bloavezhioù zo evit kendrec'hiñ Suafrika n'eus plas ebet er bed evit ur vro a lak e pleustr un doare apartheid.


D'an 13 a viz Du 1974 e oa bet Yasser Arafat e New-York evit goullenn ouzh izili Aozadur ar Broadoù Unanet e vefe krouet ur Stad emren e Palestina. Diskouezet en doa e bistolenn ha skour ur wezenall-vez evel arouezioù an daou hent a c'helle dibab Palestiniz. Hiziv, temsal a ra c'hoazh an Istor etre ar feulster hag ar peoc'h. Evelkent ez eus peadra da gaout spi pa weler ez eus kalz keodedourien en Israel, pell diouzh komzoù hag oberoù taer o renerien, hag a soñj dezho ne vo peoc'h ebet tra ma vo an eil pobl o waskañ eben. Kemer a reont perzh en oberezhioù enep-feulster evit ma vefe klevet o mouezh.

Tangi Leguere

1. Goude ar brezelioù (6 devezh ha Kippour) ez eus bet ac'huset tiradoù nevez gant Israeliz. Votet ez eus bet disenteziou en ASU evit lavarout emañ Israel er maez ar gwir etrebroadel.

Nabi Saleh : ar prizon, labourva rezistañs Palestiniz

Ur gêriadennig palestinat eo Nabi Saleh. Stourm a ra hec'h annezidi a-enep laeroñsi o douarou gant Israeliz, a vev en tavadennoù bet diazezet e-tal dezho. An drevadennerien israelat a wask dizehan war buhez Palestiniz : ac'hub an douarou, distruj ar madoù ha stankañ an dour, laeroñsi pe serriñ hentoù (un hent a c'hell bezañ "serret da Bolestiniz", sed aze perak e vez komzet eus apartheid), spontañ an dud en o buhez pemdez, difenn outo mont da lec'h-mañ-lec'h... Armoù zo ganto, ha feuls-tre int.



Sikouret e vezont gant arme Israel ivez, a zifenn annezidi an tavadennoù (tri soudard evit un tavadenner dre-vas) evit kenderc'hel da ziazezañ tavadennoù war an douarou palestinat ha gellout brasaat anezho daoust m'eo difennet-groñs gant al lezennou etrebroadel. Tsalah eo anv al lu-se, armoù a deknologiezh uhel-tre ganto. E-touez dek arme galloudusañ ar bed emañ Tsalah. An tamm douar aloubet-se, Sisjordania, a zo pep ouz ar Mor Marv, ha troc'het gant ur voger vras diouzh douarou all ar vro anvet Israel hiziv an deiz (a-raok 1948 e oa Palestina anv an holl douarou-se).
Daoust m'eo difeuls stourm annezidi Nabi Saleh, 13% eus tud ar gêriadenn a zo toullbac'het hiziv an deiz, evit n'ouzer ket pegeit, hag alies hep bezañ bet barnet. Pep Gwener, devezh sakr ha diskuizh sañset, e sav mouezh ar re wasket dre vani-

festadegoù e-tal d'an drevadenn, evit goulenñ ma vefe doujet o gwirioù. Ha bep Gwener a vez lusket gant trouzioù brezel, gaz diskarget, lec'hioù ac'hubet, tud gloazet, huchoù : en un tu nemetken ez eus armoù koulskoude.

MERC'HEDE E-KREIZ AR STOURM


Dreistordinal eo perzh ar merc'hed e stourm Nabi Saleh : ar baotred eo a vez serret gant ar soudarded ar peurliesañ. Feuls-kenañ e c'hell bezañ hag an arme a ya betek lazhañ tud, evel eno er bloaz paseet. Serradegoù a vez alies-bras ha n'eus forzh pegoulz. Ar baotred yaouank a vez tapet hep abeg ebet peurvuiañ. Hent ar gêriadenn a vez enket gant an arme evit ma ne vefe ket muioc'h a dud o stourm outo, hag evit ne c'hellfe ket estrenien testenian, gant fotooù ha filmoù dreist-holl, eus feulster ha krizder ar pezh zo



eno. Bezañ toullbac'het a zo deuet da vezañ ur prantad ret pe dost, evit buhez ar Shabab, yaouankizoù ar gêriadenn, adalek dek vloaz dre vras. "Ret eo en em brientiñ bemdez ha bezañ prest e ken kaz e teufent da glask war da lerc'h, noz ha deiz. Da lâret eo kausket bemnoz gwisket hag all rak gellout a rafe ar soudarded dont da z'kerc'hat."

BUHEZ PEMDEZ AR VUGALE


Bugale ar gêriadenn a zo boas bremañ. Ar re vihanañ a oar ur bern traoù diwar-benn an toull, ha darn eus o c'hoarioù a zo liammet outañ. C'hoariet e vez ganto ar pezh a revont bemdez hag a vez o luskañ o buhezioù, gant feulster : muntroù, tiez aloubet gant ar soudarded tud gloazet, tud serret, prozezioù en hebraeg (ha gomprenont ket) dirak al lez-vrezel, jahinezeh en toull-bac'h... Anavezout a reont ar gerioù resis a lusk buhez an den toull-



bac'het, hag anv kement prizon zo, daoust dezho bezañ en tu all d'ar voger vras bet savet gant Israeliz. Perak eo ken feuls an arme a-enep d'ar re a sav o mouezh ? Sur-bras peogwir o deus an pennoù Israel e tihunfe ar c'hêriadennoù all da-heul ma welont e c'hell cheñch an traoù war hent ar rezistañs pobl. Kreskiñ a ra neuze ar vugale gant ar c'hoant da enebiñ ouz ar renad sinour ha stummañ a reont o identelezh war se. Ur c'hiz eo deuet da vezañ evit ar familhoù, un deskadurezh.

PRIZONIDI AR C'HENTAÑ INTIFADA

Bloavezhioù fonn ar rezistañs en toullbac'h a vev e-pad ar c'hentañ Intifada, pa veze toullbac'het 25 000 den bep bloaz. Lakaat a reas ul luskad da zont war wel, urzhiet mat adal 1970 : goulennet e vev ganto ma vijent lakaet da brizonidi brezel




Estrenien a vez o vanifestiñ ingal e Nabi Saleh gant Palestiniz, evit gellout testenian da c'houde. Harzet pe gouerrouze e vezont ivez gant soudarded Israel.
Boas eo bugale ar gêriadenn da zibunañ dirak Israeliz.

Cheñchet eo kalz an traoù dibae evit kenderc'hel ar stourm ouz Israel, ha n'eo ket war an tu mat, nag evit gwirioù ar brizonidi nag evit frankiz an douarou ac'hub bet. Koulskoude eo an toullbac'h ul lec'h evit deskiñ hag anavezout un toullbac' traou evelkent, ha n'eo ket erru poent na teufe a-benn Israeliz da zistruj nezh-kalon Palestiniz toullbac'het. Rak evit lavarout ar wirionez, spontusoc'h-sponsutusañ e teu da vezañ buhez pemdez Palestiniz, daoust dezho stourm a zeiz da zeiz evit o gwirioù ha re o bugale. Evit gellout bevañ. Tra ken.

Asia Tamimi ha Laghi Mita
bradhoneg gant Krista Ploer
Evit gouzout hiroc'h :
<http://BDSFRANCE.ORG>
<http://NABISALEHSOLIDARITY.WORDPRESS.COM>
<http://972MAG.COM/PHOTOS-THE-STORY-OF-NABI-SALEH-PERFORMED-BY-THE-FREEDOM-THEATRE/70459/>

Kenderc'hel a ra karzhadeg pobl Palestina : Bedouined an Naqab¹ en arvar

Graet en deus an istorour israelat Ilan Pappé² gant an doare-lavar karzhadeg pobl, a-zivout an Nakba (ar Gwalleur), pa oa bet kaset kuit war-dro 750 000 Palestinad eus o zi hag eus o bro, etre diwezh ar bloavezh 1947 ha miz Mae 1949, gant ar strolladoù armet sionour ha goude gant lu Israel. E-pad an Nakba e oa bet lazhet Palestiniz e meur a gêriadenn. Koulskoude, ne oa ket pal ar garzhadeg pobl-se distrujañ poblañs Palestina, met kas anezhi kuit, dre he spourañ. Hiziv e vez skarzhet Palestiniz eus o douaroù (pe eus o zi, da skouer e Reter Jeruzalem) ; mont a ra war-raok ar garzhadeg pobl, hep na vefe lazhadegoù ; met tud a vez lazhet alies-tre gant ar flastridigezh pemdeziek en Tiriadoù Aloubet. Hiziv emañ Bedouined an Naqab (Negev en hebraeg) en arvar da vezañ skarzhet diwar o douaroù diwezhañ. Emaint o vevañ eno abaoe ar 7^{vet} kantved, deuet eus Arabia. Katreerien int bet e-pad kantvedoù, o vevañ diwar o loened, betek ma voe krouet harzoù gant ar Stadoù en amzer-vremañ.



Bedouined yaouank eus gouelech Naqab/Negev. © G. G. / AFP / Getty Images

Arava, ur gêriadenn Bedouined "dianavezet", e-tro 8 km a norzh Beersheba, bet diskaret hag adsavet 59 gwech.



© E. Hama

eraktres-lodennañ Palestina, renet gant ar Rouantelezh Unanet abaoe 1920 ha degemeret gant Aozadur ar Broadoù Unanet e 1947, e oa bet roet gouelech an Naqab d'ar Stad Yuzev (deut da vezañ Israel e miz Mae 1948). D'ar mare-se ne oa trevadenn yuzev ebet eno, nemet e Beersheba. Met e-giz-se o deus bet Israeliz un digor war ar Mor Ruz. D'ar mare-se e oa c'hoazh ar Vedouined hanter-gantreerien. Da vare ar brezel etre Stad Israel hag ar Stadoù arab tro-dro (miz Mae 1948-miz Mae 1949), e oa bet skarzhet ul lodenn bras eus ar Vedouined. E 1952 ne oant ket mui nemet 12 000 en Naqab. Abaoe 1948, n'eo ket bet anavezet bis-koazh gant gouarnamant Israel gwirioù ar Vedouined war o douaroù, en enep da Vreizh-Veur. Adalek ar bloavezhioù 1960 he deus klasket Stad Israel lakaat ar Vedouined da bozetaat³ ha da vevañ e seizh kêr nevez e Biz an Negev. Ar re baourañ en Israel eo ar c'hêrioù-se, gant ur feur dilabour uhel-tre ha kudennoù sokial grevus-tre ; keñveriet int bet ouzh an townships e Suafrika.

STAD BEDOINED AN NAQAB BETEK BREMAN

Gant an hanter eus ar Vedouined e oa bet nac'het ur seurt "diskoulm". Kendalc'het o deus da vevañ e 45 kêriadenn "dianavezet" gant ar Stad. Nevez kavet enno na dour-red, na tredan, na skolioù, na servijoù-yech'hed, na servijoù-dezougen. En hevelep mare eo aet war gresk an trevadennoù krouet gant Israeliz. Abaoe e vez distrujet ingal ar c'hêriadennoù-se gant Israeliz, hep digoll o annezidi. Ha padal, ar Vedouined zo keodedourien Israel anezho (evel holl Balaestinz Israel, d.l.e. ar re chomet en Israel goude an Nakba hag o diskennidi). Bez' e chellont, ma fell dezho, ober o c'hoñje e-barzh Tsahal, lu Israel. Distreiñ a ra ar Vedouined d'o c'hêriadenn distrujet, hag a vez adsavet gant skoazell annezidi ar c'hêriadennoù "dianavezet" all⁴. Er mod-se ez eus bet distrujet hag adsavet kêriadennoù zo nousep gwech. Nevez zo o deus staget Israeliz da blantañ gwez evit mirout ouzh ar Vedouined da zistreiñ, ar pezh a vez gwelet gant Israeliz evel ur "gudenn".

RAKTRES PRAWER-BEGIN : UN EIL NAKBA

Hiziv ez eus etre 140 000 ha 170 000 Bedouin o vevañ en Naqab c'hoazh, un drederenn eus poblañs ar rannvro-se a ra tost d'an hanter eus Israel. Diwar 13 000 km² an Naqab e vez dalc'het 1 000 km² gant Israeliz ; n'eus nemet 320 km² a vez dalc'het bepred gant ar Vedouined. Un danvez-lezenn a zo studiet bremañ gant kannaded ar C'hnesset, Parlamant Israel. Mar bez degemeret, ne chomo nemet 150 km² gant ar Vedouined. Ur strollad labour a oa bet bodet e 2009, renet gant Ehud Praver ha Benny Begin. Ganto ez eus bet kinniget ur raktres, da reoliañ da vat "kudenñ ar Vedouined". D'an 3 a viz Genver 2012 e oa bet embannet un danvez-lezenn, dindan an anv "Reoliañ mod annezidi ar Vedouined en Negev". Lakaet eo bet war daol ar C'hnesset d'ar 6 a viz Mae diwezhañ. En Israel e rank un danvez-lezenn tremen teir gwech dirak bodadenn ar C'hnesset evit bezañ degemeret. Votet ez eus bet warni el lennadeg kentañ d'ar 24 a viz Mezheven, 43 c'hannad o votiñ a-du, 40 a-enep ha 37

neptu. Kalz o doa votet a-enep pe neptu, peogwir e soñje dezho eo re vat an danvez-lezenn evit ar Vedouined ! Moarvat e tremeno dirak ar C'hnesset evit an eil gwech e dibenn miz Here, ha buan a-walc'h e tremeno evit an trede gwech.

War a seblant e vefe anavezet ganti gwirioù ar Vedouined war o douaroù. War a seblant. Da gentañ o do ar Vedouined da zegas prouennoù eus o gwirioù hiniennel war o douaroù, perc'hennet ganto en ur mod a-stroll ! Diaes-tre e vo en ober : luziet-tre e vo an difraeoù. Betek bremañ ne veze ket anavezet ar prouennoù skrivet dalc'het gant ar Vedouined abaoe amzer an Durked (a-raok 1918) ; ouzhpenn-se eo bet "kollet" an dielloù a oa e ti-kêr Beersheba, a oa enno prouennoù gwirioù ar Vedouined. D'ar re a vo anavezet o gwirioù, e vo lezet un tamm tachenn all, na vo nemet an hanter, en he brasañ, eus o douar. Ret e vo dezho mont kuit goude bezañ skarzhet diwar o douar kement savadur, kement gwezhenn ha kement loen zo. Dibabet e vo gant servijoù gouarnamant Israel lec'h an tamm douar lezet ganto evit o "digoll".

Kemer douar ar Vedouined eo pal al lezenn. Lakaat a ra galloud ar gouarnamant da vezañ brasoc'h. Abalamour d'al lezenn-se e vo tabutoù etre ar Vedouined o-unan evit brasañ mad Israeliz. Gwarezet nebeutoc'h gant al lezioù-barm e vo ar Vedouined. N'eus preder ebet e-barzh al lezenn diwar-benn steuñviñ ar mod annezidi. Touellus penn-da-benn eo ar mod kuzuliat. Mar bez lakaet al lezenn da dalvezout e c'houzañvo kalz ar Vedouined, a gollo o mod-bevañ, pa vint diwiziennet. Nac'het e vo o gwir da vezañ perc'henn, da zibab lec'h o annez ha da gaout ul lojez. War-dro 30 000 pe 40 000 den (betek 70 000 hervez tud zo) a vo kaset kuit hep gellout dont en-dro. Diwar betra e vevint ? Reiñ a ra ar gouarnamant da grediñ e vo aesc'h buhez ar Vedouined gant al lezenn ; anavez a ra memes tra e vo kaset kuit 30 000 den evit ober plas d'ar Yuzevien Israelat.

A-benn ar fin ez eo bet tennet kuit an danvez-lezenn Praver-Begin d'an 12 a viz Kerzu. Hervez Benny Begin e-unan ez eus bet divizet kement-se abalamour d'an disrannoù etre kannaded ar muiañ-niver er C'hnesset. Bez' ez eus bet manifestadegoù

bras ha taer ivez er mizioù diwezhañ en Naqab pe e Tel-Aviv, o vodañ Israeliz, Yuzevien hag Arabed a-gvret. Un trec'h eo evito diviz ar gouarnamant, un trec'h hag a vevzh memestra : n'o deus ket steuziet ar gourduzioù da viken ha chom a ra man-trus hag arvarus buhez Bedouined an Naqab⁵ er c'hêriadennoù "dianavezet".
Yes Jordin

1. An anv arabek eo Naqab. Negev o vezañ an anv hebrek (a gannet impijet ar muiañ e mediaoù ar C'hornôg).
2. Bez' e c'heller lenn al lev. Le voyage ethnique de la Palestine, gant Ilan Pappé, istorour israelat, embannet e 2008 gant Fayard.
3. bozetaat : paouez a vezañ katreerien (jeñ). E gallec : (le) sédentariser.
4. Bez' e c'heller sellet ouzhpenn ar film Shariya gant ar filmour israelat Assi Lerner, siginet evit ar wech kentañ e Frañs d'ar 7 a viz Du 2012.
5. Bez' ez eus Bedouined all o vevañ e traouien ar Sîber Jordan (neou all a zo ivez er Sinai, d.l.e. en Egipt), ul lodenn eus an Tiriadoù Aloubet. Distrujet e vez kêriadennoù ar Vedouined-se ivez, ha n'eus ket skodeoerien Israel anezho ; diwezhoc'h-diaesañ e teu o buhez da vezañ. Skarzhet o deus Israeliz div drederenn eus ar Balaestinz. Bedouined en o c'hev, e oa o vevañ eus c'hoazh.

Buhez Palestiniz Bethlehem



Penniliz ar C'hinvelezh e Bethlehem

Gant an darvoudoù er broioù arab, ha nebeutoc'h a feulster, ne giever ket anv kalz eus Palestiniz ken. Met n'eo ket erru ar peoc'h eno, un dra anat a-walc'h pa reer ur veaj da Vethlehem.

Tri seurt takadoù a vez kavet e Palestina : A, B ha C. Emañ Bethlehem en A gant div gêr all, Beit Sahour ha Beit Jala. Al live uhelañ a emrenerezh zo eno, ha diouzhtu e weler an diforc'h : ar boliserien a zo palestinat ha ne vez ket graet gant an hebraeg war ar panelloù. Ar velestradurezh a-bezh a zo meret gant ar galloud palestinat. Met arabat eo kredin ez eo ur vro disheñvel : pep tra a vez paeet gant shekel, ha ret eo tremen dre ar *checkpoint* meret gant arme Israel.

hag eno eo posupl mont d'an aerborzh."

MONT KUIT

Meur a seurt kristenien a vez kavet er Reter : katoliked evel-just, met ivez ortodoksed, Assirianed, Melkited, Armenianed, Maronited, Kopted... Er bloavezhioù 1960 ha 1970 o doa soñjet renerien an ilizoù gwellaat Palestina dre an deskadurezh. "*Evel-se ez eo bet uhelaet al live deskin er skolioù ; stummet ez eus bet ijinaourien, skiantourien, skolveuridi met evita ne oa ket peadra da gavout labour diouzh o live amañ. Gant o stummadurioù uhel o deus gelllet mont kuit ha bezañ degemeret e broioù all*" eme Abou Rami Asakrieh, beleg o labourat er skol frañsezat Douar Santel e Bethlehem. Ar gristenien a yae d'ober 80% eus ar boblañs 60 vloaz zo, ha bremañ n'eont d'ober nemet 25%. Muioù c'h a gristenien balestinata a vez kavet hiziv en Amerika eget e Palestina. Souezhet e c'heller bezañ avat o welet pegen bev e gom ar gumuniezh katolik. Hag evit diskouez e c'heller cheñch traoù er vro ez eus bet savet ur skipailh Labourerien Gristen Yaouank (evel ar JOC¹ e Breizh) zoken gant Rami Asakrieh.

PESEURT DAZONT ?

Da vare an eil *Intifada*, dek vloaz zo, ne zeue pirc'hirin ebet ken : goulo e oa an ilizoù, ar stalioù hag an ostalerioù. Dont a reont en-dro bremañ, hag arc'hant lakaet en-dro en ekonomiezh met chom a ra diaes an traoù. "*30% eus an dud a zo dilabour, diaes eo fñival gant ar voger en traoù, ha laeret e vez douaroù gant Stad Israel tamm-ha-tamm*" eme Abou Yacoub Sa'da, person melkit eus Bethlehem. Lavarout a ra ouzhpenn : "*A-raok pell ne vo ket a-walc'h a zouaroù ken evit sevel tiez amañ*". Dre-vras ez eo dipitet an dud gant emglevioù Oslo² ; den ne gred ken en diskouloù politikel gant emgavioù etre Palestiniz hag Israeliz. Soñjal a ra d'an dud ne cheñcho ket an traoù kelt ha na ziskouezo ket ar broioù estren muioù c'h a c'hoant da ziruustlañ an traoù.

Benead Lukian

1. JOC : Jeunesse ouvrière chrétienne, kevredigezh yaouankizoù kristen metoù ar vicherourien krouet e 1925.
2. Emglev lakaet e pleustr d'an 13 a viz Here 1993 ha sachet abaoe an eil Intifada diskliet e 2000.

CHECK POINT

Evit an douarist pe ar birc'hirined, n'eo ket re ziaes mont da Vethlehem, pe en ur gêr balestinat all. Diaesoc'h eo mont er-maez, miret e vez ar paperioù ingal ha diaes-tre eo evit Palestiniz : "*Ne'm eus ar gwit da dremen ar check point nemet div wech ar bloaz, evel-se e c'hellan mont da Jeruzalem evit gouelioù Nedeleg ha Pask. Serr e vez a-wechoù, hep tamm displegaden ebe!*" eme ur vaouez hag a zalc'h ur stalig war blasenn Nedeleg. "*Evit Israel, n'omp nemet Jordaniz. Evit mont da lec'h all eo ret deomp kemer an hent da Jordania*

Prosez politikel e Breujoù Breizh



Ur 80 den bennak o doa en em dolpet dirak Palez ar Justis e Roazhon d'11 a savadur Breujoù Breizh, evit harpañ stourmer Al'ta!

D'al Lun 18 a viz Du e oa prosez Padrig Laurent dirak lez-varn galv Roazhon, e savadur Breujoù Breizh. Tapet e oa bet stourmer Al'ta! gant an archerien pa oa o pegañ ur pegsun "e brezhoneg" ouzh ur banell e kumun Fouenant. Rebechet e oa bet outañ bezañ peget ur 80 bennak a begsunioù e Bro Fouenant a-bezh. Betek 7500 euro tell-gastiz' a oa bet goulnnet digantañ paeañ gant kumunioù Fouenant hag ar Forest-Fouenant hag ar Kuzul-departamant Penn-ar-Bed war ar marc'had. D'an 9 a viz Kerzu e oa bet embannet ar barn.

Strollad Al'ta! en doa galvet an holl a c'halle dont d'en em vodañ dirak ar savadur brudet adalek 8 eur 30. Un hanterkant bennak a dud a oa deuet da ziskouez o c'hengred gant Padrig ha da aloubiñ sal vihan ar prosez hag an trepas. Tri zest oa bet pedet da reiñ o soñj war an afer gant ar breutaer Erwan Lemoigne : Tangi Louarn, prezidant Kevre Breizh, Kristian Troadeg, maer Karaez ha kuzulier-departamant, ha Yoran Delacour, embanner brudet. Tangi Louarn en doa displeget, da skouer, penaos ne c'houlenne Padrig hag Al'ta! nemet doujañs ouzh gwirioù anavezet hag embannet gant an Unesco¹ hag ar Broadoù Unanet 'ta, gant Europa ha gant Frañs hec'h-unan zoken rak enskrivet eo er Vonreizh eo ar "yezhioù *"rannvro"* "*un tamm eus glad ar republik"*, Kristian Troadeg en doa diskliet pegen pilpous ha dreizh eo emzalc'h dilennid Penn-ar-Bed p'o doa votet pell zo evit lakaat divyezhek holl banelloù an departamant, ar pezh a dalvez cheñch re Fouenant hag ar Forest-Fouenant un detz bennak. Diskouezet en doa ivez penaos eo poellekoc'h ha marc'hadmatoc'h stalinañ panelloù divyezhek eget dispign arc'hant gant klemmoù a-enep tud reizh ha kalonek. Yoran Delacour en doa lakaet war wel penaos ne

vez graet striv ebet gant Kumun Fouenant, da skouer, evit an divyezhegezh, betek nac'h skoazell an departamant zoken.

AR PANELLOÙ HEPKEN

Ne felle ket d'ar prokolor lakaat ar gaoz war an dachenn bolitikel ha goulnnet en doa digant ar varmerez treiñ he sell war-zu ar panelloù "*stlabeze!*" nemetken. Meneget en doa koulskoude e oa gwerch roll-barn Padrig Laurent. Breutaerez an departamant he doa goulnnet mirout telloù ha taol kastiz. Erwan Lemoigne, breutaer Padrig, en doa lakaat ar gaoz diouzhtu war an dachenn bolitikel en urlâret e oa lozh'c' emañ, paotr Sant-Nazer, o reiñ skoazell d'ur paotr a Benn-ar-Bed. Degaset en doa soñj eus kaozioù an tri zest diwar-benn gwirioù ar Vretoned ha penaos e vezer rediet, re alies, d'an disentez keodedel daoust d'an emglevioù sinet ha d'ar promesoù. Displeget en doa mat ivez penaos e vez implijet ar panelloù gant an holl evit lakaat memozhioù politikel war wel ha n'eus nemet stourmerien ar brezhoneg a vez galvet d'ar c'homiserdioù pe kaset ingal dirak al lezioù-barn. Evit echuiñ en doa degaset da soñj d'ar varmerez penaos oa bet barnet un toullad tud o doa peget ha skrivet liganoù war panelloù-brudañ evit klemm a-enep ar mor a vruderezh e

kêr-benn ar republik ha penaos e oant bet laosket da vont digabestr. D'an 9 a viz Kerzu e oa bet embannet barnadenn Padrig Laurent. Nac'het an digolloù daoust an div gumun hag an departamant. Douz da se e chom un dell-gastiz 600 € war choug ar stourmer. D'an 13 eus ar memes miz e vo prosez ur stourmer all eus Al'ta!, Tristan Nedeleg, en Oriant. Un afer droc'h all pa oa bet dilamet he c'hlemm gant marer ar Ardeven a-benn ar fin...

Y.L.M.
1. da lâret eo 1 690 € goulnnet gant Fouenant, 2 439 € gant Forest-Fouenant, 574 € ha 1 500 € (Reoù justis) gant Kuzul-departamant Penn-ar-Bed ha 1 022 € tell-gastiz ouzhpenn.
2. Unesco : United Nations for Education, Sciences and Culture Organization, Azadur ar Broadoù Unanet evit an deskadurezh, ar skiantoù hag ar sevenadur.

Mignoned Al'ta!

Ur gevredigezh zo bet savet nevez zo evit reiñ harp da stourmerien Al'ta! kaset dirak ar varmerien. "Mignoned Al'ta!" hec'h anv. Fellout a ra ivez da izili ar gevredigezh skoazellañ en un doare ledan an holl re a gas ar yezh war-raok er vuhez publik. Evit gouzod hiroc'h : <http://mignoned-kern.eu>

Schtroumpfiñ, hanial ha dihanial

Bet on bet, èl bep blez, da bardon Sant-Paperig e Karaez, rak na bout n'eo ket gwall bell ne gavan ket fiapl mont da bardon Spezed. Ar blez-mañ e tegouezhe ar pardon d'ar pevarvet Sul ag ar miz : ar rakpardon a oa bet lakaet d'ar Sadorn.



Golo Ar Schtroumpfed hag an Torrakoag, embannet gant BZH5, hag ar bajenn 29



Karaez, kêr-benn an embann brezhonek evit un dibenn-sizhun a-bezh. Adal ar Gwener da noz e oa bet roet tu d'an dud, an embannerion vras, da staliñ o marc'hadourezh. D'ar Sadorn vintin, evit dek eur e oa an holl, tier-embann bras, bihan pe bitik zoken, a-dreñv o bernioù levrioù. Sioul e vez bepred ar mintiniadoù e Salon al Levrioù : amzer en dez èl-se pep unan d'ober e dro, da zemata ar vignoned, ar gensoried, lâret un tammig kaer gete ha doareatellat... Lod anezhe ne oant ket bet gwelet a-c'houde ar pardon diwezhañ. Rak 'maez a Garaez ec'h eus tud na weler nemet a pa vez un intermamt pe ur vanifestadeg vras. Koshoc'h omp holl ag ar memes stand, er memes korn ag ar sal alies !

Donet a raer da Garaez evit derc'hel standoù, hag evit gouiet penn d'ar levrioù nevez. Ret eo lâret e kaver anezhe a-vezad, ha bec'h get lod ag an tier-moullañ

darbar e koulz ar pezh a c'houlenn an embannerion e miz Gwengolo pe Here : berrek e vënt alies get o labour.

UR LEVR BANNOÙ-TRESET NEVEZ

Ur bern traoù kaer am eus kavet, èl bepred, levrioù bras ha levrioù bihan, met an dra en deus graet ar muiañ a blijadur din ar blez-mañ e oa gwelet embannet e brezhoneg ur levrenn ag ar Schtroumpfed, korriganed glas hollvrudet an tresour Peyo : *Ar Schtroumpfed hag an Torrakoag*, embannet get BZH5, da lâret eo ar "meuriad" ar Menn. Lakaet eo bet e brezhoneg get Brieg, lizherennet get Malo, kenurzhiet get Tangi, ha get sikour Garmenig, Katell, Lanwenn ha Dewi. Un afer familh enta ! Div lodenn a zo el levr : hani an tit hag un istor arall. *Ur Schtroumpf dishenvel diouzh ar re all*, ha 61 pajenn en holl.

Sonj a-walc'h am eus ag ar blez ma oa daet er-maez evit ar wezh kentañ e galle, *Les Schtroumpfs et le Cracouass*, er sko-

laj e oan neuze. Krog e oa mod ar Schtroumpfed ha "schtroumpfed" e veze e porzh ar skol. Bannoù-treset ne vent ket ken stank èl bremañ hag ur pezh prof e veze a pa resevec'h unan "gwiñ", kartonet kaer, evit ho plez pe evit devezh get sant. Ar ar "pemdezh" e tremenep get *Blek le Roc*, pe *Zembla*, pe *Attack*, levrioù marc'had-mat dozvet doc'h ar c'hilometr. Tudennoù bihan ar Belgiaed Peyo (Pierre Culliford, 1928-1992, "tad" Johann ha Pirlouit, Benoît Brisefer ivez), abaoe, o deus graet o hent ; anavet eo e voulomigoù glas er bed a-bezh. Un den hag a anavan mat en deus graet alies kraou an Nedeleg get Schtroumpfed plastik ! Ha setu-int é komz brezhoneg bremañ.

SCHTROUMPFD EM EUS UN HANI

Diâr-benn "schtroumpfiñ" e oan é komz disadom get an tiad ar Menn, ha setu en em gavet get Garmenig é tiviz ag ur ger anavet geti e kostez Langoned ha get tud Bro-Gwened ivez : "hani".



Setu mekanik-bizskrivañ Ronan Huon, gwelet e Karaez e diskouezadeg 400th niverenn Al Liamm.

Petra eo un hani ? Un dra ne ouier ket mui e anv, peotramant ne za ket deoc'h buan a-walc'h.

"Roit din an hani..." : gellout a ra bout an divonter, ar raskler-karot, an doullerez... Ne vern, ne gavit ket an anv a-benn : un hani eo neuze. Ma zad-kozh-me a oa mestr bras ar an hanierezh. Haniâl pe haniñ a rae da bep penn-frazenn.

"Gwelet em eus Hani, gouiet a rit, paotr Langedig..." Ne gaver ket mui e anv : Hani eo neuze, get ur bennlizherenn en ho peg mar plij genoc'h !

Haniâl a raer ivez, pe dihanial. Lakaomp ho peus haniet re greñv golo ur podad yod-avaloù e vo ret deoc'h haniâl kreñv evit en dihanial ! Ha marse memes kemer un hani (ur star-dibiñs) evit donet da benn.

HANIOCH EGED AR SCHTROUMPFD N'EUZ KET!

An dud sot a lakaer un tammig hani-hani, lod a zo hanioc'h evit lod arall. Èl ma

skrive Yann-Vari Heneu e-barzh istor Janig Beboer :

"Nend eo ket groñs ag ar re haniñ, met haniâl a ray get an amzer. Nend eo ket c'hoazh met trivec'h vlez, kroget en he naontek. Kavet a ran truekoc'h egeti ; a-c'houde daou vlez ne'm eus ket kavet gwel."

Ur verb haniâl arall en dize gelllet bout lakaet e-barzh levr Martial Ménard *Alc'hwez Bras ar Baradoz Vihan* ivez.

Un toullad skrivagnerion o deus graet get ar ger, dre-fent, ha peadra a vehe da schtroumpfiñ ur pennad hir ha maget mat evit *Hor Schtroumpf* un deiz bennak. "Schtroumpfiñ" hag "haniâl" a zo verboù kendirvi enta, èl m'emañ "kar pe karr'kell" holl schtroumpferion ha hanierezh ar bed-mañ.

Setu enta, get *Ar Schtroumpfed hag an Torrakoag*, ur levr bannoù-treset oc'hpen, hag unan ag an dibab. Ne vo biken re anezhe. Setu un dra galonekaus ivez e Salon al Levrioù : é welet niver bras

al levrioù daet er-maez, ne vo ket diaes d'an Tad-Nedeleg dibab ur re bennak anezhe ar blez-mañ, kargiñ e vouteg zoken mar kar !

LABOUR AL LIAMM ENORET

Èl mand on é vizkriviñ ar pennad-mañ, èr ma urzhiaerezh, benveg burzhudus n'eus ket aesoc'h evitañ evit oc'hpenñiñ, difara, kemm, tenniñ pe adlakaat, em eus ur soñj evit labour ramzel Ronan Huon, hag a ree pep tra ar e vekanig bihan Roay get pasianted ha hirlabour. Enoret e oa get 400th niverenn *Al Liamm* ar blez-mañ e Karaez, hag a eno am eus degaset, da lennerion *Bremañ*, o lod-pardon ma ne oant ket bet evit mont da Sant-Paperig ar blez-mañ : skeudenn ar mekanig-se. Enor da saverion *Al Liamm* ha trugarez d'ar "meuriad" Huon derc'hel da gas ar gaze-tenn en-dro. A-benn pegoulz e vo roet prizioù d'ar meuriadoù oberiant ?

Daniell Doujet

1. "Kar pe karr'kell" : tro-lavar, kar doc'h un tu bennak na oui den pehani ! Kendirvi mod Brezh.



Lou Reed war ul leurenn e Stockholm e 2008. sk. Skrammel

Lou Reed

Evit ar braz eus an dud ez eo Lou Reed kaner *Walk on the Wild Side*, ha fentus a-walc'h eo, pa ouzer eus petra zo kaoz er ganaouenn-mañ. Estreget hemañ e savas tonioù e-leizh, gant The Velvet Underground da gentañ hag e-unan goude. E dibenn miz Here e oa marvet unan eus ikonennoù ar sonerezh rock.

Ganet e voe Lou Reed e 1942 e Brooklyn (New York) en ur familh yuzev. Da 5 bloaz e voe lakaet da zeskiñ seniñ gant ar piano, met buan e tilezas ar benveg-se, pa oa gwelloc'h gantañ seniñ gitar. Pa oa 17 vloaz e voe lakaet da c'hrouz strouñserioù-tredan, war zigarez e ranke en em zibober diouzh e blegoù heñvelkev. En hevelep mare e stagas gant lonkañ louzoù, ha buan e voe stag outo.

Goude studiañ er skol-veur e labouras e bed an embann pladennoù, hag e kejas ouzh John Cale (soner violoñs kembreat). Goude-se e tegemerjont Sterling Morrison (gitarout) ha Moe Tucker (tabouliner), hag evel-se eo e voe krouet The Velvet Underground ganto e 1965. Meizet e voe ar strollad gant ur mignon da Andy Warhol, ha sed ma voe produet hag arc'hantaouet pladenn gentañ ar strollad gant al livour hollvrudet. Ouzhpenn ar strollad e voe pedet ar ganerez alaman Nico da ganañ meura don. E miz Meurzh 1967 e teuas ar bladenn er-maez, hag unan all (*White Light / White Heat*) a voe e 1968. Div bladenn all a voe c'hoazh (e 1969 hag e 1970) a-raok ma chomas ar

strollad a-sav. Lou Reed e-unan a bellaas diouzh bed ar sonerezh betek 1971.

AR VUHEZ GOUDE THE VELVET UNDERGROUND

Goude divodañ e strollad kent e tivizas Lou Reed derc'hel gant ar sonerezh. Div bladenn a embannas e 1972 : *Lou Reed* ha *Transformer*. Ne reas ket kalz a verzh gant an eil, gant eben avat e teuas da vezañ brudet. Enrollet ha produet e voe *Transformer* gant sikour Mick Ronson ha David Bowie, ha div ganaouenn a gaver enni a lakaas Reed da dapout brud : *A Perfect Day* (a glever er fim *Trainspotting*) ha *Walk on the Wild Side*. Marteze a-walc'h ez eo *Walk on the Wild Side* kanaouenn vrudetañ Reed, met sur a-walc'h ne daol ket plied ar selaouerien eus dodenn an ton...

War a lenner amañ hag ahont ez eo etre 1972 ha 1976 ma voe Lou Reed e barr e vrud, gant pladennoù evel *Berlin* (1973) ha *Coney Island Baby* (1976). E 1975 e voe souezhet meur a hini pa lakaas embann *Metal Machine Music*, ur bladenn ma ne glever nemet larsen ha *feed-back* gitaroù tredan. Engravet e oa bet ar

bladenn vinil en doare ma ne chomfe biken a-sav. Ma ne reas ket berzh Reed gant er mare ma voe embannet ar bladenn e lavarer hiziv an deiz e voe ar bladenn gentañ ma klever sonerezh industriell ha trouz : daou seurt sonerezh a reas berzh un nebeud bloavezhioù goude.

Un nebeud pladennoù all a lakaas embann er bloavezhioù 1980, hep ober berzh avat. Betek lakaat embann *New York* (1989), ur bladenn gouestlet d'e gêr vuiañ-karet. Enni e klevur div ganaouenn a reas berzh : *Romeo Had Juliette* ha *Dirty Blvd*. Er bladenn e klevur Reed o kanañ gant e zoare dezhañ etre kanañ ha komz. E 1990 e teuas *Songs For Drella* er-maez, savet a-gevret gant Reed ha John Cale. Ur bladenn gouestlet da eñvor Andy Warhol eo. Advodet e oa bet The Velvet Underground e 1989 war zigarez ur sonadeg e Bro-C'hall da-geñver un diskouezadeg oberennet gant Andy Warhol. Un nebeud sonadegoù all a rejont e 1993.

Derc'hel a reas da embann pladennoù ur wech an amzer er bloavezhioù 1990 ha 2000 : *Magic and Loss* (1992), ma komz eus mignoned aet d'ar bed all, ha *Set the*


Twilight Reeling (1996), ur bladenn ma kan meuleudi da New York ur wech ouzhpenn. Kenlabourat a reas ivez gant strolladoù sonerien liesseurt, evel Gorillaz (*Plastic Beach*, 2010) ha Metallica (*Lulu*, 2011). E 2011 edo e Karez, da-geñver festival sonerezh an Erer Kozh.

LEVEZON VRAS

Chom a raio bev e eñvor peogwir e voe degaset kalz kemma e bed ar sonerezh amplaet gant The Velvet Underground, a-fet seniñ koulz hag evit a sell ouzh dodennoù ar c'hanaouenn. Ne voe ket ken brudet ha The Beatles pe The Rolling Stones, met bras e voe levezon Reed war meur a luskad sonerezh : rock arzel, sonerezh industriell/trouz ha sonerezh dazeilat. Sed ma c'haller lakaat anezhañ e-touez ar re a lakaas ar sonerezh da gemmañ er bloavezhioù 1970, gant David Bowie hag Iggy Pop. Hag evel ma lavaras Brian Eno, ne voe ket prenet pladenn gentañ The Velvet Underground gant ur bern tud, met kement hini a brenas anezhi a savas e strollad sonerezh dezhañ goude-se.

Ronan Menardeau

Lou Reed war leurenn an Hôp Fam Music Festival e Paddock Wood, Kent, Bro-Saoz, d'an en e vuz Gouere 2011.



Un dibab pladennoù



The Velvet Underground & Nico (1967)
Kement tra a c'haller lavaraout diwar-benn "pladenn he banarierenn" a zo bet lavaret c'hoazh. Ma ne voe ket gwerzhet mat er mare ma leuas er-maez e kaver anezhi hiziv an deiz e kement roll ma reer anv eus pladennoù gwellañ ar sonerezh amplaet. Ar sonerezh, ar c'han hag ar mod ma voent produet a zo deuet da vezañ pimpatromou klasek.



White Light / White Heat (1968)
Muioc'h a zramm, muioc'h a rev, muioc'h a rock'n'roll. Here *She Comes Now* eo an ton pop nemetañ a glever er bladenn. Ar peurrest eus ar bladenn a zo diazezet war radoù amod ar bladenn gentañ, nemet e splujont donoc'h er sonerezh-amodiñ. Ar re galonekañ a selouo ton diwezhañ ar bladenn (*Sister Ray*, ouzhpenn 17 munuten) en un tenn, evel ma voe enrollet.



Transformer (1972)
Bowie, Ronson ha Reed o kenlabourat : diaes ober gwelloc'h d'ar mare-se. Diwar dek ton ez eus pevar a voe savet da vare The Velvet Underground. Ouzhpenn an div ganaouenn nemetet er pennad a-us e klevur *Satellite of Love* ivez.

"Lennomp!", div bajennad *Bremañ* savet evit ar re a zo o teskiñ (hag ar re all ivez!).
 E-kichen tili ar pennadoù hag ar rubrikennoù e vo laketao...
 ul levrig (pennad live A2, aesoc'h da lenn) pe daou levrig (pennad live B1, un tamm startoc'h).

- Sekredoù-kegin**
 an itron Chaodouron
- Haggis zo mat, loñla**
- Peogwir ne vo relike ebet ken ganin adalek ar miz a zeu e roan deoc'h ma doare Haggis din-me. Aozit anezhañ a-benn nozvezh Burns d'ar 25 a viz Genver, e koun ar barzh skos Robert Burns.
- AOZENNOÙ :**
- 100 g beiz
 - 175 g kerch
 - 25 g a valzennoù kerch
 - 1,5 loailad vras a Marmite (pe vegemite)
 - 100 g margarin
 - 1 penh-ognon troc'het a dammoù bihan
 - 100 g togoù-touseg troc'het a dammoù bihan
 - 50 g fer glas
 - 50 g fer koural
 - 100 g TVP protein gwialdennek (soja)
 - 400 ml boullhoñs
 - 2 loailad vras a bebr du
 - 2-3 loailad vras a louzoù kegin a bep seurt
 - 1/3 chug ur sitroñs
 - 1 werennad vihan a wiski

Breizh-Euskadi war varc'h-houarn (lodenn 4)

Eizh eurvezh ha daou-ugent diskuizh e ti mignoned en Hendaia hag e tapan an hent adarre evit un droid dek devezh ha 600 kilometr e Bro Euskal, su ha norzh.



Kalz startoc'h eo evit an 900 kilometr kentañ : menezioù ar Pireneoù zo er vro ha tomm-berv eo anezhi. Bemdez e krapan odoeul. An hini uhelañ a zo hini Oreaga (Roncavaux) gant 1 059 metrad uhelder. An dro a ran dreist-holl dre ar c'hêrioù e lec'h ma'z eus mignoned din o chom. Alies-mat na'm bez ket da blantañ an deltenn na da fardañ boued ken. Adalek Hendaia ez an betek Baiona en ur dremen dre rannvroioù Navarra, Navarra Izel, Zuberoa, Gipuzkoa ha Bizkaia. Kêrioù bras a dreuzan evel Iruña pe Donostia. Dañjerus e c'hall bezañ war varc'h-houarn.

UR VRO LIESEURT

Brav-eston eo ar vro gant gweledvaoù liesseurt : menezioù, koadoù hag ar meurvor. Vad a ra mont da neual er stêrioù pe er mor goude un devezh o strivañ.

Puilh eo istor ar vro ivez hag e welan ur bern tud war hent Santiago de Compostela, pep a grogenn Sant Jakez gante ouzh o sac'h-kein pe ouzh lost o velo. En Oreaga peotramant e Donibane Garazi evel-just, met e kreiz neblec'h ivez. Ma sikour ar mod da veajiñ da gejañ gant tud ar vro e sikour ivez ar gwenn-ha-du staliet e penn a-dreñv ma marc'h-houarn. Anavezet mat eo hor banniel eno.

Goude teir sizhun beaj, 1 500 kilometr a strivoù, kejadennoù brav hag eñvorenoù kaer eo erru poent distreiñ da Vreizh... Gant an tren, adalek Baiona.

Fabris Caddou

- gerioù start**
 = gerioù benel
- e koun ... : en mémoire de ...
 - barzh(ed) : poète(s)
 - heiz (coll.) : orge
 - kerch (coll.) : avoine
 - malzenn (où) kerch : flocon(s) d'avoine
 - fer glas (coll.) : lentilles vertes
 - fer koural (coll.) : lentilles corail
 - gwialdennek : texturé
 - dizourañ : égotter
 - frinkañ : faire sauter
 - lommig(où) : un peu (d'un liquide)
 - goleñ : recouvrir
 - irvin-saoz (coll.) : rutabagas

- gerioù start**
 = gerioù benel
- diskuizh : repos
 - tomm-berv eo anezhi : engager la conversation
 - il fait très chaud
 - ode (où) : col(s)
 - dizalc'hour : indépendantiste
 - chom a-sav : faire un arrêt
 - bod ha boued : le gîte et le couvert
 - toullañ kaoz : engager la conversation
 - gweledva(où) : panoram(a)s, paysage(s)
 - meurvor(ioù) : océan
 - puilh : riche, abondant, intense
 - krogenn : coquille
 - peotramant : ou bien e kreiz neblec'h : au milieu de nulle part e penn a-dreñv ... : à l'arrière de ...
 - kejadenn (où) : rencontre(s)
 - eñvoren(où) : souvenir(s)

Tud ar miz



Siti Aishah Abdul Wahab, 69 bloaz, zo bet dieubet gant polis Londrez goude bezañ bet laketa da sklav gant ur c'houblad e-pad tregont vloaz. Div blac'h all, 57 vloaz ha 30 vloaz, zo bet bac'het ha korvoet er memes mod er memes ti. E Malaysia emañ familh Siti Aishah o chom.

Divi Kervella en deus troet nouspet levr bannoù-treset e brezhoneg (*Tintin*, ar *Meleganezed*, ar *C'hazh*, *Astérix*). Abaoe miz Du e c'heller lenn en hor yezh istor **distro-skol Nikolazig**, krouet gant Sempé ha Goscinny e 1959, hag embannet bremañ gant IMAV Editions.

Jennifer Lawrence a gendalc'h da c'hoari perzh Katniss Everdeen, harozez **Catching Fire**, en eil film savet diwar romantoù *The Hunger Games* gant Suzanne Collins. Meur a briz he deus bet an **aktorez** 23 bloaz evit he labour. Daou film all a vo evit **klozañ** an istor.

- gerioù start** = gerioù benel
- dieubet : libérée
 - sklav(ed) : esclave(s)
 - bac'het : séquestrées
 - korvoet : exploitées
 - nouspet : on ne sait combien de
 - bann(où)-treset : bande(s) dessinée(s)
 - distro(nù)-skol : rentrée(s) scolaire(s)
 - perzh(ioù) : rôle(s)
 - aktorez (ed) : actrice(s)
 - klozañ : conclure

Lin ha Lan



Notenn yezh Lennomp #brezhoneg!


E niverenn a zeu *Bremañ*, e miz Genver 2014, e vo echu gant rann "Lennomp I". Koulskoude, ne vo ket echu gant embann ingal danvez evit an deskidi : ur gelaouenn a-bezh a vo zoken!

#brezhoneg eo ar gelaouenn nevez-se. Bep daou viz e vo embannet, 24 fajenn enni ha 5 € an tamm. Kavet e vo pennadoù-skrid berr gant gerioù displeget, notennoù diwar-benn ar yezh, ha bannoù-treset evel ma veze e "Lennomp I".

Estreget-se a vo avat ! E pep niverenn e vo laketa ar gaos war ur c'horn-bro, gant ur pennad-skrid, ur pennad-kaoz, keleier berr. Bro an Alre zo bet en niverenn gentañ, Douarnenez a vo en niverenn 2 ha Klison en niverenn 3. Peadra da anavezout gwelloc'h ar yezh hag ar vro war un dro. C'hoarioù a vo ivez. Danvez ouzhpenn a vo war Internet, gant traoù da glevet, respontoù c'hoarioù...

Emañ skipailh Skol an Emsav o labourat war al lodenn-se. Mont a raio war gresk tamm-ha-tamm. Sikouret e vo sevel al lec'hienn gant ar c'hant Redadeg 2014 !

- Evit resev ur skouerenn digoust. Netra aesoc'h ! kasit ur postel gant hoc'h anv hag ho chomlec'h da : brezhoneg@skolanemsav.com
- Evit koumanantiñ. 30 € ar bloaz eo priz ar c'houmanant. Paeañ gant ur chekenn war anv Skol an Emsav, dre lamadenn viziek (2,5 €) pe dre Internet gant ur gartenn-vank a c'heller ober.



Mekanoskrid an Eil Orin

Manuel de Pedrolo
Katalonia e-tro ar bloavezhioù 1970. E-kichen ur poull-skuz. Daou baotr o stlepel un trede en dour abalamour ma'z eus ur "morian" anezhañ. Dre chañs e tegouezh ur grennardez d'e sikour hag hep soñjal pelloc'h e lamm en dour. A-greiz-holl avat e tifoup pladennoù-nij en oabl ha tennañ a reont. Ne chom ket ar plac'h da arvestriñ pelloc'h outo pa soñj saveteiñ ar paotr hag hi ha splujañ. Pa'z eont o-daou er-maez eus an dour ez eo marv an daou baotr all. Buan e welint ez eo marv ivez tud ar gêriadenn ha dismantront pep tra.

Aze e krog ur vuhez all gant Alba, ar grennardez pevarzek vloaz, ha Didac, ar paotr dek vloaz. Ur vuhez digenvez, en o unan. Diskouez a ra Alba bezañ ur plac'h a benn. Diouztu he deus ur soñj pizh eus ar pezh a zo d'ober ha kemer a ra Didac dindan he c'hazel.

Arabat eo deoc'h bezañ engortoz eus ur skrid leun a virvilih, emgannoù diouzh an druilh ouzh ezduandi pe ouzh bandemadour laeron aet o spered diganto evel e **Mad Max**. Naren ! Skrid Manuel de Pedrolo a demfe kentoc'h d'ur seurt Abrobin goude an Apokalips. Kontet e vez d'al lenneren peñsoù en em zibab Alba ha Didac evit kavout bod ha boued hag evit kas da benn uhelennad ar grennardez : adbloañ an Douar, dre ma soñj dezhi n'eus ken nemeto en bev c'hoazh.

N'eo ket ul levr eta evit an dud sot gant an emgannoù ha gant ar suspens. Anzav a ran em eus kavet hir ma amzer gwech ha gwech all. Koulskoude e oa un dra bennak am broude da vont pelloc'h dalc'hmat. A-benn ar fin ez eo ur wach klozet al levr ganin em eus gallet tañva gwelloc'h talvoudegezh ar roman, rak ur bern goulennoù a sav diwar e lenn. Petra em bije graet e-lec'h an daou-se mar bijn bet en o lec'h ? Emichañs ne vijen ket aet gant ar memes hent ha ne'm bije ket soñjet heñvel. Mat-tre em eus kavet ivez ar raskrid divyezhek diwar-benn an oberour. Kentelius eo e meur a gevner.

Stefan Carpentier

Embannet gant Skrid. Brezhoneg gant Gwenole Blouin Berheret, Erwan Hupel, Gwendal Denez, 166 p., (14 € an tamm)

Pa ra glav

Leire
Salaberria
Loret e oa bet al levr-se gant ar priz V Premio Etxepare 2011 evit ar gwellañ levr euskarek evit ar vugale.



Embannet gant An Alarc'h (10 € an tamm)

Ur sorserez eo Mamm-Gozh


Maina Mallejac
N'eo ket plijet Nolwenn gant mignon he mamm. A bep seurt e raio evit kas anezhañ kuit eus ar gêr...



Embannet gant Keit Vimp Bev (5 € an tamm)

Tramor, son ha ton

Frank Bodénès
Kuitaet Bro-Saoz gant Stanley, E Breizh e cheñcho e vuhez war domou punk, rock ha metal.



Embannet gant Keit Vimp Bev (6 € an tamm)

Al Liamm


Niv. 400
Lidet e oa bet war an ton bras niverenn 400 *Al Liamm - Tir na nÓg* e Karaez da-geñver Gouel al Levrioù. C'hwech danevell gant ul skrivagner ha teir skrivagnerez, lizheroù barzhonegoù ha notennoù lann zo bet paket brav en ur vaketenn nevez-flamm. Evit gouzout hiroc'h : www.alliamm.com



Embannet gant Al Liamm (7 € an tamm)

Les messagers du duc de Bretagne


Pierre-Emmanuel Marais
Bloavezh 1364, en em gavout a ra an lwarzhonad yaouank Duncan O'Hara e Breizh evit klask war-lerc'h e dad, e-kreiz brezel hârezh an dugelezh. Adframmet, astennet hag adskrivet en deus aze Pierre-Emmanuel Marais istor *Emgannoù Duncan O'Hara* bet embannet e brezhoneg da gentañ gant Keit Vimp Bev. Danvez ouzhpenn a zo el levr gallek-mañ evit ar re bet plijet gant stumm orin an istor zoken.



Embannet gant Yoran Embanner (10 € an tamm)

EMSAV

Le mouvement breton de A à Z
Georges Cadiou
Anavet mat eo Georges Cadiou a-drugarez d'e levrioù a-zivout ar sportoù pe an Istor. Diâr-benn an EMSAV eo e levr diwezhañ. Sirius, hep bout luziet avat, eo al levr-mañ a zo evit daou seurt lennerion. Ar re na ouint tra pe dost a-zivout an EMSAV. Get ar re-mañ e vo diskuliet bre vldremm an EMSaverion. Ha get ar re arall a anav tamm-pe-damm an EMSAV e vo lennet get plijadur pennadigoù a-zivout tud karet pe gasaet gete, hep chom diseblant gwezh erbet. A-drugarez d'al levriennadurezh fonnus eo'h eus moaien monet pelloc'h get bep a dem pe zen deskrivet ivez. A-c'houde pell e oa ret sevel ul levr a seurt get hani Georges Cadiou a-benn ar fin. Arguzennoù enep pe e tu an EMSaverion a gaver ennañ. Mes n'int morse savet a feiz fall pe gant faltazi an eil re pe ar re arall. Ul levr dizouerous eo enta.



Embannet get Coop Breizh, 439 fajennad (24,90 € an tamm)

Antony Heulin

LENNIT **bremañ**
GWISKIT **STERED**™

Koumanantit diouzhtu-dak hag e profo Bremañ deoc'h ur rochedig Stered.

50€ ar bloaz
4€ ar miz



www.stered.eu

Talvezout a ra ar prof-mañ evit ar goumananterien nevez hepken betek ma vo diviet ar stokoù. Pezhioù-dilhad Stered profet betek deiziad an 31 a viz Genver 2014.
T-shirt du **Awenet gant Breizh** evit ar baotred. Pemp ment : S, M, L, XL, hag XXL. Top du **Awenet gant Breizh** evit ar merc'hed. Peder ment : S, M, L hag XL. T-shirt gwenn **Evit dazant hor yezh** evit ar baotred. Pemp ment : S, M, L, XL, hag XXL.

KOUMANANTIT DRE CHEKENN Koumanant bloaz 50€ | Estrenvro 60€ | Skoazell adalek 60€
war anv Skol an Emsav **NEVEZ !** Paeañ enlinenn a c'hellit ober gant ur gartenn-bank e www.skolanemsav.com

Talvezout a raio ho koumanant dre lamadenn betek ma vo goulennet ganeoc'h chom a-sav.

AOTRE LAMADENN VIZIEK
AUTORISATION DE PRÉLÈVEMENT

Me hag a sin amañ dindan a ro an aotre da Skol an Emsav da sevel bep miz diwar ma c'hont evit ma c'houmanant da **Bremañ** :
Je soussigné, autorise Skol an Emsav à prélever mensuellement sur mon compte au titre de mon abonnement à Bremañ la somme de :

➔ €

D'an/Le
E/a
Sinadur/Signature

KOUMANANT DRE LAMADENN VIZIEK
ABONNEZ-VOUS PAR PRÉLÈVEMENT MENSUEL

lamadenn 4€ adkaset a viz da viz | skoazell pe estrenvro adalek 5€
prélèvement de 4€ reconduit mensuellement | soutien ou étranger à partir de 2€

Niv. Embanner
N° Emsav
44470
Skol an Emsav

Plaouer ar gont delek | Titulaire du compte
Anv | Nom
Anv-bihan | Prénom
Chomlec'h | Adresse
Kumun | Commune
Pgz | Tél.
Kod-post | CP
Postel | Courriel

Lamet e vo ar paeamant diwar ar gont-mañ | Compte à débiter
A bouez ! Lakaat un DAB a-gevret ! Important ! Joindre un RIB obligatoirement

Bank | Banque
Niv. kont | N° de compte
Aic'hwaz | Clé
Bank | Banque
Chomlec'h | Adresse
Kod-post | CP
Kumun | Commune

Da gas da : **Bremañ - 25 straed Pierre Martin - 35000 Roazhon - Breizh**
Ar follet-mañ a vez kavet da belgargañ al lec'h-henn www.skolanemsav.com.



Euzhviled chakod, c'hoazh hag adarre !

E 1996 e oa bet diskoachet euzhviled bihan iskis e Japan gant ar c'hoari Pocket Monster (ruz ha gwer). Er bloavezhioù war-lerc'h e voe azasaet ar c'hoari evit ar bed a-bezh e stumm Pokémon Ruz ha Glas. Ar c'hoarioù Game Boy embannet gant Nintendo o doa graet berzh diouzhtu hag e pep lec'h. Petra nevez e bed Pokémon e 2013 ?

Tajiri Satoshi en doa krouet an embregerezh diorren c'hoarioù video Game Freak e 1989. Kenlabourat a reas gant Nintendo alies, betek krouidigezh **Pokémon**. Ar rummad c'hoarioù a zo bet ezhporzhiet d'ar Stadoù-Unanet e 1998 ha da Europa e 1999. Abaoe ar mare-se ez eus bet seizh koublad c'hoarioù nevez all (hep kontañ koubladoù *remake* pe un trede c'hoari da vont gant ur c'houblad, evel **Pokémon Melen** da skouer, nag an eilc'hoarioù doare **Pokémon Donjon Mystère**) war bevar benveg all, reoù hezoug Nintendo bepred. Ouzhpenn se ez eus tresadennoù-bev, filmoù bevaat, kartoù da zastum, levrioù manga ha kant tra all abaoe an deroù pe dost. Hirie an deiz ez eus en tu-hont da 700 "euzhvil" : ur sapre zoo eo hini **Pokémon** !

Met petra eo ar c'hoarioù **Pokémon** ? RPG (*Role Playing Game*, d.l.e c'hoarioù roll) int a dremen en ur bed gant loened bihan a c'haller dastum ha desevel. E pep

c'hoari e rank an haroz(ez) pourmen en ur vro bennak evit glask Pokémoned, evit sevel ur skipailh loened hag evit gounit emgannoù da greñvaat anezho. A-bep-eil e rank pep den hag a gemer perzh en emgann dibab un dra d'ober (tagañ, cheñch Pokémon hag all). Pep Pokémon en deus un doare resis d'en em gannañ hag a zo kreñv pe gwan keñveriet gant unan all (ar perzh "dour" zo kreñvoc'h evit hini an tamm gwan keñveriet gant ar perzh "plant" da skouer).



Kartenn kom-bro ar c'hoarioù nevez, Kalos, diazezet war Stad Frañs.

peadra da c'hourdonañ anezho, cheñch dilhad ha neuz hon tudenn, emgannoù hag eskemmoù a-vil-vern er bed a-bezh dre ar rouedad... Ur blijadur eo ar c'hoari ha dieub omp da c'hoari evel ma karomp.

ESTREGET AR C'HOARI ZO

Ouzhpenn ur bloavezh nevez o tremen e Kalos en heuliad fiñv-tresadennoù **Pokémon** ez eus bet savet ivez ur stirad nevez **Pokémon Les Origines**, a c'haller sellet digoust e lec'hienn ofisiel ar merk, hag a dremen da vare ar c'hoarioù kentañ-tout. Dister a-walc'h eo an tresadennoù met ur sell disheñvel a zo (heñveloc'h ouzh ar c'hoarioù) hag a lak ar preder war ar perag desevel euzhviled. Prederiadennoù a oa bet degaset dija e **Pokémon Gwenn** ha **Du**, peogwir e wele tud zo buhez ar Pokémoned evel un doare sklavelezh-dudi. Ar gevredigezh PETA¹ a zo bet awe-net ivez peogwir e vez kavet ur c'hoari digoust hag a drevez **Pokémon** evit komz diwar-benn ar c'hastizoù graet d'al loened.

Ha prest oc'h da sevel ho skipailh Pokémon bremañ ?



1. PETA : *People for the Ethical Treatment of Animals*, ur gevredigezh norzhamerikan brudet-tre.

SEITEK VLOAZ WAR-LERC'H

Abaoe an 12 a viz Here e c'haller c'hoari gant an 8^{vet} koublad c'hoarioù nevez gant **Pokémon X** ha **Pokémon Y**. Ar c'hoari kentañ e skeudennoù tejrmentek penna-da-benn eo. Tremen a ra an traoù e rannvro Kalos a zo diazezet war Stad Frañs. Trugarekaomp ar skipailh treiñ gallek en deus klasket lakaat blaz un tamm gant al lodennoù a dremen e "Breizh" ! Ur bern nevezenti a zo er c'hoari. Distro Pokémoned ar rummadoù kentañ, un doare nevez gant ar "voudig", daou Bokémon "mojenel" nevez evel-just, un doare da emdreñ e-kerzh an emgannoù "mega-evolution", c'hoarioùigoù (un doare "porzh" evit c'hoari gant hor Pokémoned),



Ar re zrouk nevez, an Team Flare.

Ur skeudenn eus un doare emgann nevez er c'hoarioù **Pokémon X** ha **Pokémon Y**.

Que doit faire Marisson ?

Un emgann etre ar pokémoned Sylveon (Nymphali Feelinara) ha Hydroïgon (Troxyhidre Tikephalo).

